

GWERZIOÙ : ISTOR, FEULSTER, KARANTEZ HA MEMOR (3)

Gwerz ha karantez drouk a vo en taol-mañ, gant ur werz savet kalz war-lerc'h ar reoù dastumet ha miret e levrioù pe e mediaouegoù zo (evel reoù Dastum). Unan eus perzhioù ar gwerzioù zo diskouez darvoudoù bet, echuet fall peurliesañ. En dastumadennoù gant Kervarker pe an Uhel e vez anv eus muntroù, eus merc'hed gwallet ha labezet... ya, un testeni eus ar feulster e-keñver ar merc'hed. Nerzh ar gwerzioù zo dreist-holl an doare ma vezont degemeret gant ar selaouerien : krediñ a greder ar pezh zo kanet, ar wirionez eo. Evel a gonte ma zad-kozh Trogeri : « 'C'h an da lâret un dra deoc'h zo tost d'ar wirionez wir ! ». Nerzh ar pezh a vez kontet, hag a-raok pep tra nerzh ar gomz. Kanerien a-vremañ o deus graet eus ar gwerzioù ul lodenn gaer eus o arz, lod muioc'h, lod nebeutoc'h. Ha splann e chom ar gwerzioù ur perzh kreñv eus hon sevenadur kanet. Soñjal a c'haller en Denez Prijant pe en Bernez Tangi.

Amañ ne vo ket anv eus ur vag kaset da bokat hardizh da gerreg aod ar Roc'hell. Anv a vo eus ur plac'h en Landelo, ur barrouz nepell diouzh Karaez, ur plac'h a vano dizanv, trist ha truezus he zonkad. Ur werz tremen kaer savet gant Bernez Tangi.

Un toullad bloavezhioù zo em boa bet ar chañs da selaou ouzh Bernez... asambles gant Denez... o kanañ ar werz « a capella ». Un drugar a-fet arz, met ivez un drugar a-fet lakaat pozioù da dremen. Leuskel a ran ac'hanoc'h da lenn ha da selaou ar werz (al liammoù am eus lakaet e traoù ar bajenn) : un istor trist ha teñval met pegen boutin en hon memor pobl, siwazh. Merc'hed gwallet, gwallgaset, merc'hed o koll o buhez.

Un dra a lârin ouzhpenn memestra : sellit mat ouzh stumm ar werz, ouzh he gramadeg. Ur stumm boutin d'an holl gwerzioù kozh : kaset e vez ar stummadurioù verb e dibenn ar gwerzennoù, ha se en un doare sistematek (ar pezh a ro klotennoù niverus en -et). Kement-mañ n'emañ ket e yezh ar pemdez, met kement-mañ a ro un nerzh dibar d'ar gwerzennoù.

Herve Bihan

Plac'h Landelo

Bez' zo ur plac'h e Landelo  
landandeli di landandandeli  
di lan dan dan deli do  
bez' zo ur plac'h e Landelo  
kant gwech 'deus karet  
kant gwech bet gloazet

Freget he c'halon e pilhoù  
'barzh 'vefe kavet  
ur prad alaouret

Kleier hanternoz gant o sko  
ez a kuit diarc'hen  
gant he sae saotret

Ur puñs e-kichen a zo  
d'ar veol hi zo aet  
he divvromn 'deus glebiet

Al loar a luc'h tro-war-dro  
an dour sioulaet  
'zegas dezhi he c'hened

Met, galv 'ra 'nezhi ar c'hav

va c'hoantig karet  
amañ 'vo ankouaet

'Kichen 'kresk ur bod-iliav  
mar plij, me ho ped  
kemerit un tamm

Hag an tamm-se c'hwi a daolo  
'lec'h 'ma-hi kousket  
'N he bez-dour da viken.

(gant aotre hegarat Bernez Tangi)

Levrlennadur berr ha lec'hiennoù

Bernez Tangi, Fulennoù an tantad, Skrid, Lesneven, 1987, pp. 84-85

Bernez Tangi, Plac'h Landelo war ar bladenn Lapous an Tan, 2009 :

<https://www.youtube.com/watch?v=qK8HppQFjOg>

Denez, Gwerz, Embannadurioù Ouest-France, 2023.

Patrick Malrieu, Histoire de la chanson populaire bretonne, Dastum & Skol, 1983.

